

AR VUHEZ KRISTEN



ADMINISTRATION

13, Place Alsace-Lorraine
LORIENT



C/C. POSTAL n° 209-84

SUR
NANTES

Koumanantchou

An holl goumanantchou a gomans e miz Genver. — Skriva an hanoioù hag an adress fraez ha penn-da-benn ; ma n'eus bureo post ebet er gomun, lakat gant pehini e vez graet.

Koumanant ordinal : **6 l.** ar bloaz.

Koumanant a enor : **10 l.** ar bloaz, gant perz e 365 OFERENN (unan bemdez) a vez lavaret bep bloaz evit hor madoberourien.

N.-B. — Hol lennerien, m'o deus c'hoant, a c'hell dreizo o-unan rei frouez an oferennoù-se d'o zud varo.

Adkoumanantchou

An neb a vez echu e goumanant, a vez kaset d'ezan dre ar post eur « MANDAT-CARTE », evit ma c'hello koumananti a-nevez. —

Ni a gont war bolontez vat hol lennerien evit paea raktal.

An neb n'en devo ket paet *TRI MIZ GOUDE*, ne resevo mui ar gelaouenn.

TAOLIT EVEZ : lavarit atao petra 'zigasit d'eomp : EUN ADKOUMANANT pe EUR C'HOUMANANT NEVEZ ; ma tigasit asamblez adkoumanantchou ha koumanantchou nevez, *DISPARTIA MAT ANEZO*. — Evit eun adkoumanant, rei d'eomp an adress eür *EVEL MA OA WAR AN NIVERENN DIWEZA...* ha ma'z eo ret, goulenn da-c'houde chanj anezi.

Chanj adress

Evit chanj adress, digas d'eomp 4 real e timbrjou gant an adress evel ma oa war an niverenn diweza.


Liziri ha skridou

An holl liziri a dle beza kaset da :

Administration de « Ar Vuhez Kristen »,
13, place Alsace-Lorraine, Lorient (Morbihan)
C.-C. 209-81, Nantes

N.-B. — Ar gelaouenn-man a zo moulet ivez e galleg ; rak-se ar re o defe c'hoant da gaout an hini c'hallek e-lec'h an hini vrezonek, n'o defe nemet skriva d'eomp, hag e vefe kaset d'ezo *La Vie Chrétienne* e-lec'h *Ar Vuhez Kristen*

Meulet ra vezo Jezuz-Krist !... Bepred



Kenteliou Sant Fransez

— KELAOUENN AN DREDE-ÜRZ —

An holl liziri a dle beza kaset da : R. P. Eugène Le Quéau,
28, Avenue de la Marne, Lorient — C/C. 291-62 Nantes.

Nedeleg

*Petra 'zo henez a-neve,
Pa zo leiz a dud war vale ?
Perak ez a, a vandennoù
Ar bobl en noz, d'an ilizou ?*

Gouel ebet hag a denera ar galon kement ha Gouel Nedeleg. An holl a oar petra en deus graet hon Tad sant Fransez evit enori Ginivelez ar Mabig Jezuz, pa reas kana an oferenñ hanternoz e koad Gresio.

Tri dra da ober dirak kraou Betleem : sellout, selaou ha komz.

a) SELLOUT. — Piou a zo gourvezet war eun dournad plouz, en e gichen ar Werc'hez Vari ha sant Joseb ? Piou ? Ar Mesiaz gortozet abaoe ar penn kenta eus ar bed. Piou ? An Eil Ferson eus an Dreinded en em c'hraet bugelig. Piou c'hoaz ? Salver an holl dud.

O ! N'eo ket eur c'hrouadur evel ar re-all, rak Doue an Tad en deus lavaret anezan : « *Te a zo va Mab, ha d'it e roïn an holl rouanteleziou. — Setu aze va Mab muia karet, selaouit anezan.* »

N'eo ket eur c'hrouadur evel ar re-all, rak a-boan m'eo

ganet, Aelez dre vilierou, a ro d'ezan meuleudi, Pastored ha Rouaned a zeu d'Hen adori. N'eo ket eur c'hrouadur evel ar re-all, rak E vuhez a zo bet annouset penn-da-benn meur a gant vloaz a-raok.

N'eo ket eur c'hrouadur evel ar re-all, rak Hen E-unan a lavaro diwezatoe'h : « *Va Zad ha me a zo unan. — Me am eus an holl c'halloud hag en ew ha war an douar.* »

b) SELAOU. — Biskoaz kan ken dudius. Aelez diskennet eus ar baradoz a ra d'ar vro tregerni : « Gloar da Zoue e bolz an Nenv, ha war an douar peoc'h d'an dud a volonteiz vat. — Me a zegas d'eoc'h eur c'helou eürus, a lavar unan anezo d'ar Bastored, Ganet ez eus hirio d'eoc'h eur Salver, ar C'hrist, an Aotrou e kêr David. Hen anaout a reoc'h diouz ar merk-man : kaout a reoc'h eur bugel maillhuret ha gourvezet en eur c'hraou. »

Perak kement a levenez gant an Aelez ? Dre ma welont Doue o fiskouez eur garantez dreist-muzul d'an dud, betek en em lakaat henvel ouz unan anezo. Perak c'hoaz ? Dre ma welont Mab Doue o kemer eun natur den evit atao. Ya, gloar da Zoue, ha peoc'h d'an dud a volonteiz vat, peoc'h gant Doue dre ar pardon, peoc'h gant an nesa dre ar garantez, peoc'h d'ar galon he deus breman grasou evit trec'hi war an techou fall.

c) KOMZ. — Mabig Jezuz, me hoc'h ador gant feiz ha gant devozion. Bez' ez oc'h va Doue ha Salver. Drezoc'h eo bet graet pep tra ha drezoc'h eo saveteet an holl eneo. Ne fell ket d'eoc'h e vefe kollet den ebet.

Bennoz ha mil bennoz d'eoc'h da veza kemeret truez ouzomp. Mil bennoz d'eoc'h, dre m'hoc'h eus digoret a-nevez ar baradoz ha serret dindan hon treid dor an ifern.

Me ho kar a-greiz kalon, o Mabig Jezuz. Kinnig a ran d'eoc'h va c'horf, va ene ha va c'Ealon.

Bennigit ac'hanoun, va sikourit da virout ho kenteliou hag ho vertuziou. Hen tui a ran, dirak ho kavel, me a zo d'eoc'h da viken.

Eun dever eo astenn an Trede-Urz e-touez ar pob-lou hag ober d'ezi douged frouez.

(Léon XIII).

Mari konsevet hep pec'hed

Unan eus ar goueliou ar muia enoret gant Bugale sant Fransez eo Gouel Mari konsevet hep pec'hed. « *Fransez, a skrive sant Bonavantur, en doa evit ar Werc'hez eur garantez birvidik; kemer a reas anezi evit e Alwokadez hag Alwokadez e holl vugale.* »

En he chapel, e savas e urz kenta, hag e-kichen e fellas d'ezan dont da vervel. Er bloaz 1219, e rôas urz d'e relijiuzed da gana bep sadorn eun oferenn en enor da Gonsep-sion ar Werc'hez. Er penn kenta eus an Doktored hag eus ar skrivagnerien vrudet o deus labouret evit ma vije diskle-riet Mari konsevet hep pec'hed, eman Duns Skot eus Urz kenta sant Fransez.

« *O Werc'hez Santel, an donezon dispar hoc'h eus bet da veza bet diwallet diouz pec'hed hon tud kenta ho laka dreist an holl grouadurien. N'omp ket gouest d'ho meuli, evel m'eo dleet, evit ker bras burzud; an Aelez o-unan n'int ket evit kompren an enor rôet d'eoc'h gant ho Mab. Bezit truez ouzomp-ni, paour-keiz pec'herien. Flastrit a-nevez e benn d'an droukspered; eman ganeoc'h an holl c'halloud, c'houi hag a zo Tenzorierz an holl c'hrasou. A-walc'h eo ma pedit eur wech hepken evidomp.*

Mari Dinamm, hor Mamm hag hor Rouanez, c'houi ha c'houi hoc'h-unan a zo din da veza selaouet. Goulennit evidomp ar glac'har d'hor pec'hejou gant ar volonteiz start da vera bemdez e karantez ho Mab. Deuit, da eur hor maro, da zegemer hon ene, evit ma c'hellimp holl meuli Doue ganeoc'h a-hed an eternite. »

Almanach Franciscaïn 1936

Unan eus an Almanagou kaera, hag a dlefe beza e pep Breuriez

Skriva da : Librairie Saint-François,
4, rue Cassette Paris (VI^e)

Priz : eur skoed dre ar Post.

KELEIER

PLOUZIRI

E Plouziri hag er Merzer, diou barrez tostik-tost, e oa hiniennou hag a heulie Reolenn Trede-Urz sant Fransez. Fellet eo d'ezo en em unani evit kaout eur Vreuriezh etrezo. D'ar 26 a viz Here, ez eo bet savet a Vreuriezh nevez enni dija 26 C'hoar a volontez vat. Ra vennigo Itron Varia ar Merzer ha sant Per o farrezianezed hag o deus c'hoant d'en em santelaat dindan banniel sant Fransez a Asiz.

ROC'H

Breuriezh ar Roc'h a zo bet ivez bizitet d'ar sul 27 a viz Here. An holl C'hoarezed a oa deut d'ar vodadeg. Ra gendalc'hint da rei skouer vat en-dro d'ezo !

SANT WOAZEG

E miz gwengolo diweza, epad ar mision prezeget er barrez gant an tadou kapusin, eo bet bizitet breuriezh Trede-Urz ar barrez. Nao c'hoar a zo deut da greski niver ar vreuriezh, en eur gemeret ar wiskamant. Mari Rivoal a zo bet hanvet presidantez.

Ra blijo gant Doue lakat e garantez da virvi e kalon ar c'hoarezed, ma hellint ober vat endro d'ezo ha skigna dre ar barrez c'houez vat Hor Salver Jezuz-Krist.

PLONEVEZ AR FAOU


Ar vreuriezh-man, unan eus re gaera ar vro a zo bet bizitet ivez. Er miz a zeu e kavot aman eun diverra eus ar bizitese.

INDULJANSOU MIZ KERZU

Da zeiz ar Vodadeg I. P.; da Dri devez all, d'ho choaz I. P.

Deizlou		Induljansou
8 S	Gouel Mari konsevet hep pec'hed.....	A.J.I.P.
12 Y	Envor eus an deiz ma voe kavet korf sant Fransez	I. P.
15 S	Trede Sul eus an Azvent.....	I. P.
25 M	Gouel an Nedeleg.....	A. J.

Kenteliou an Aviel



Parabolenn an draog

Eun devez, Jezuz a gontas d'ar bobl ar barabolenn-man :

« Eun den en doa hadet greun-mat en e zouarou. Met, epad ma oa kousket an dud, e enebourien a zeuas da deurel draog etouez ar gwiniz. Pa oa savet an ed, e oa gwelet ivez an draog. Ar vevelien a zeuas da lavarout d'ar Mestr :

— « Mestr, ha n'eo ket greun mat eo hoc'h eus hadet en ho park ? Penaos 'ta ez eus ennan kement a louzeier fall ? »

— « Va enebourien eo o deus graet an dra-se. » a respont ar mestr.

— « Mat, emezo, mar karit, ez imp da c'houennat ? »

— « Nann, eme ar Mestr, gant aon ne dennfec'h ar gwiniz da heul al louzeier fall. Lezit an eil hag egile da sevel betek an east; neuze me lavaro d'ar vederien : « Tennit da genta an draog, liam-mit anezan da deurel en tan. Warlerc'h, c'houi a zastumo ar gwiniz da lakat er solier. »

Hor Salver, goude beza kaset ar bobl d'ar ger, a welas e ziskibien o tostet outan : « Mestr, emezo, displegit d'eomp parabolenn an draog. » Ha Jezuz a respontas : « An hini a had greun mat eo Mab Doue en em c'hraet den, ar park eo ar bed, ar greun mat eo bugale rouantelez an nenv; an draog eo ar vugale fall hadet gant an diaoul; an east eo fin ar bed; ar vederien eo an elez.

« Evel ma tastumer an draog evit hen devi, evelse, e vo graet da fin ar bad : Mab Doue a zigaso elez da denna eus e rouantelez ar bec'herien hag an dud a skouer fall evit o stlapa e tan an ifern, elec'h ma vo daerou ha skrign-dent. Neuze e lugerno ar sent evel an heol, e ti o zad. Ra glevo an neb en deus dioukouarn da gle-vout. »

Poaniomp da gompren komzou hor Zalver. E park an otrou Doue, en Iliz katolik, ez eus tud vat, tud hag a laka ar wirionez hag ar grasou hadet enno gant J. K. da dalvezout evit o silvidigez. Met, bez' ez eus ivez, er memes park tud fall, tud hag a zigemer en o spered hag en o c'halon fals kredennou ar bed ha gevier a bep seurt hadet gant an diaoul. Kristenien vat ha kristenien fall a zo mesk ha mesk.

Alies, war an douar-man, ez eo dies anavezout an dud fall hag an dud vat, rak ar re-se a glask awechou kuzat o fallagriez, evit beza istimet evel kristenien vat, Met Doue a oar petra 'zo en o c'hreiz.

Alies ivez, gwir servicherien Jezuz o defe c'hoant da c'houlou digantan perak e lez tud fall da waska, da c'hoapat, da wallgas tud vat ha santel, ha perak ne daol ket warno e gurun, pa ne vefe nemet evit miret outo da goll ar re all.

Doue 'zo gwelloc'h. Gortoz a ra an devez diweza evit dispartia an dud fall diouz an dud vat, gant aon da deurel en ifern tud fall hag a c'hell dont da veza tud vat ha santel. Ar bec'herien, int ivez, a zo bet krouet gant Doue ha prenet gant gwad Jezuz. Doue en deus aon da welet anezo o vont da goll evit atao; o gervel a ra da zistrei davetan. Elec'h o skei warlerc'h o c'henta pec'hed marvel, Doue a ro amzer d'ezo da guitât o dizursiou ha da dizout ar santelez. M'en dije roet taol ar maro da Sant Paol en amzer ma walgase ar gristenien, da Sant Ogustin pa oa war an hent fall, setu daou sant nebeutoc'h, eun abostol hag eun doktor, en Iliz.

Doue a zalc'h tud fall etouez tud vat evit mad ar re-man. An dud Santel ne vefent ket ken Santel ma ne vefe den oc'h ober brezel d'ezo. O welet an droug en dro d'eomp hor sonj a zav aliesoc'h wardu Doue evit e bedi muioc'h ha gwelloc'h gant aon da goueza er pec'hed.

Erfin, kreski a reomp ennomp ar vertuz a basianted en eur c'houzanv a galon vat ar brezel graet d'eomp gant an dud fall, ar vertuz a garantez en eur bardoni d'hon enebourien.

Ar bed-man a echuo. Pa vo fin d'ezan e vo dispartiet ar re vat diouz ar re a vo chomet fall betek ar maro... Elez an Otrou Doue a zeuio da glask ar re-man evit o stlapa en tan eternal.

Bezomp-ni greun mat, greun a ra nemet guellât muioc'h-mui gant an amzer hag e vezimp dispartiet, eun devez, diouz an dud fall ha laket gant Doue, hon Tad, en e varadoz evit beza eurus da viken.



Er miz a zeu, Yann Digredenn
hag e sorc'hennou a vezo graet
adarre eun tammig hoja d'ezo
gant Petromig.

Evit an 8 a viz kerzu.

Ar Werc'hez Vari ganet hep pec'hed

Adam hag Eva a zizentas eta ouz an Aotrou Doue o tebri eus ar frouez difennet.



Ar pec'hed-se a gasas kuit dioustu eus o ene ar c'hras a ro santelez, ar vantell gaer-se a ra anezan koant ha skedus evel an heol.

Ar sent er baradoz, an elez hag an Aotrou Doue e-unan a zo eun dudi evito sellout ouz eun ene e stad a c'hras.

Ma c'hellfemp gwelout, pa ne ve nemet eur predig-amzer, pe gen kaer eo eun ene e karantez Doue, e varvfemp war an taol, ken bras e vije hol levez, a lavar deomp ar sent.

Ene Adam hag Eva, a voe eta goude o fec'hed, lammet digantan ar pez a roe dezan e sked hag e gaerder. Met, en eur zizenti ouz Doue, n'eo ket evito hepken eo e golljont an teñzor burzudus m'eo ar c'hras; her c'holl a rejont ivez evidomp-ni holl o bugale. Ha setu perak e teuomp war an douar-man, enebourien da Zoue ha sklavourien d'an diaoul, ar pec'hed en hon ene.

Daou hepken eus bugale Adam n'o deus ket bet da blega d'al lezenn euzus-se : Hor Salver Jezuz-Krist hag ar Werc'hez Vari. Jezuz-Krist a oa Doue ha darempred ebet ne c'helle beza etrezan hag an diaoul.

Ar Werc'hez kennebeut ne voe ket kailharet hec'h ene gant ar pec'hed; kerkent ha ma voe krouet e voe karget a c'hras. Gant ar c'hras e tiskennas en hec'h ene an holl vertuziou, holl zonezonou ar Spered-Santel ha kement peurz-vat a c'hell kaeraat eun ene.

Doue ne c'helle ket lezel an hini a vije eun deiz e vamm, da veza, pa ne ve nemet eur predig-amzer, sklavourez d'an diaoul dre ar pec'hed. Setu aze perak, dre veritou Hor Salver Jezuz-Krist hag ablamour dezo, e tiwallas ar Werc'hez diouz ar pec'hed orijinel ha dre eno diouz pep pec'hed.

Hag abaoe, e'h hanvomp Mamm Doue, *AR WERC'HEZ VARI GANET HEP PEC'HED.*

**

En eur virout e vamm diouz an distera pec'hed an Aotrou Doue en deus diskouezet deomp pegement a gas hag a eus en deus outañ.

Ma n'hon eus ket an eurvad da veza bet ganet e stad a c'hras evel ar Werc'hez, deuet omp buhan evelato da veza mignoned da Zoue dre sakramant ar Vadiziant, en deus gwalc'het hon ene paour saotret gant ar pec'hed.

O ! dalc'homp da viken digailhar sae wenn hor badiziant ! Ha ma c'hoarvez ganeomp eun deiz, Doue ra viro hag ar Werc'hez, koll an teñzor dispar-se, buhan deomp da zaoulina dirag ar beleg hag e sakramant ar binijenn e kavimp a-nevez stad ar c'hras.

Na jomomp morse eur vunutenn e stad a bec'hed marvel. Hag evit beza sur da virout bepred an teñzor talvoudek m'eo ar c'hras, deomp daved Mari, ar Werc'hez dinamm. Goulennomp diganti, mintin ha noz, en eur lavarout hon teir Ave, hon diwall diouz enebourien hon ene.

O Mari, ganet hep pec'hed, pedit evidomp ni a zeu da c'houlenn ho skoazell.

O Mamm, diwallit hon ene diouz pep pec'hed, epad an deiz-mañ, epad an noz-mañ. MABIG.

« An hini ne stourm ket ganen a stourm enep d'in »
(Jezuz-Krist).

Madelez eur rouanez



Er miz tremenet ez eus bet laket e gwerz er Belgia eun timbr nevez evit an oberenn enep an droukskevent. Hogen war an timbr-se eman skeudenn ar rouanez Astrid. Perak ? Abalamour ma 'z eo bet mamm ha madoberourez he fobl. Digas a ra d'eomp da soñj eus rouanezed gwella ar Frañs hag eus hon dukez Anna.

Warlene, d'ar 24 a viz C'houverer, o tiguezout dirak kannaded ar vro, ar roue yaouank en doa lavaret : « *Holl en em roan d'ar Belgia. Ar rouanez am sikouro da ober va dever penn-da-benn* ». Ha pe-

hini a vezo dever ar rouanez ? Unan bennak a c'houlennas outi eun dervez perake chome sioul er bodadegou savet en he enor. « *Ar Roue, emezi, a gomz d'ar bobl; ar rouanez e selaou.* »

Klevet he deus ar c'hlemmou a sav eus pevar c'horn ar vro : tud mac'hagnet, tud dilabour, bugale dilezet, ar re holl a zo en dienez a dro outi evit beza sikouret. Komprenet he deus he fobl hag ar bobl en deus he c'homprenet.

Kaer ha trist e oa klevout komzou an dud o deus tremenet a vilierou dirak korf ar rouanez e palez Brussel. Leñvet eo bet ganto evel unan eus o familh. Pep hini, an daelou en e zaoulagad, a gonte unan eus he oberou mat, kaëroc'h an eil eget egile.

Dre ar vro a-bez, en tiez pinvidik evel en tiez prenn, he foltred a zo er plas a enor, staget ouz ar voger, war ar siminal pe war an armel. Aliés diou c'houlouenn a zev dirazan, hag araok mont d'ar gwele, e vez lavaret eur bedenn evit « *ar rouanez vat* ».

« *N'hor boa nemet eur gwele, eme unan, ha diou c'hol-c'hed. — Skriv d'ar rouanez, eme eun amezegez. Evel just, ne gaven ket aez. N'eus forz, skrivet em eus : « Itron roua-*

nez... hag an dra-mañ, hag an dra-hoñt... » Tri dervez goude em eus resevet gweleou ha kement a oa ret. » Ha gant he c'hildourn e sec'h an daelou a red puilh eus he daoulagad.

« Va gwaz, eme unan all, a oa dilabour. N'en doa nemet eur chupenn da lakaat war e gein, ha setu me skriva d'ar rouanez. « Ernest, emoun-me, n'eo ket brasoc'h eget ar Roue, ha moan eveltan... Bez'am eus eur pakad dilhad. »

Eun darvoud a c'hoarvez en eur vengleuz, war an hent-houarn, n'eus forz pelec'h : raktal ar brinsez a red da frealzi ar re c'hloazet hag o familhou. Resevet e veze evel eun aël eus an Neñv.

Evit sikour ar beorien, an dud dilabour, ar rouanez a gestas. E-unan e tispake ar pez a vije kaset d'ezi hag he dorn a skignas he frofou hep konta. Moarvet n'eus parrez ebet er vro ha n'he defe ket resevet peadra da ober eun aluzenn d'ar re baour.

Alies zoken ar rouanez a gase e-unan ar pakadou betek an ti, ha neuze hep kemer preder gant he renk, e veze etouez an dud evel unan eus ar bobl. Er c'hontrol he stad a oa eviti eun abeg muioc'h da veza servijerez ar beorien. Eur vaouez he deus resevet eur pakad hag a drugareka ar rouanez. « Aman n'eus ket a rouanez, emezi; n'eus nemet mam-mou d'en em sikour. »

Ya, gounezet he doa kalon he fobl, ha pep hini a soñj evel ar vaouez-se a lavare o vont da welout ar rouanez eur wech c'hoaz war he gwele-kañv : « N'he deus bet, allaz ! nemet an amzer da denna warni hor c'harantez. »

TAD BRIEG.



Eur viktor muioc'h

Va mignon diskredik, hep gina re, a zeu ganen da iliz Intron-Varia ar Viktoriou. Piou oar ?... eur viktor muioc'h marteze evit an Intron, en deus dija gounezet kement a viktoriou !

Met an iliz a oa leun-tenn pa'zajomp e-barz. N'oa ket da glask tizout dar penn uhela na dre greiz na dre ar c'hosteziou. Ret mat oa chom e traon an iliz hep gwelet netra eus lidou an ofis kanet, du-hont, ouz aoter ar Werc'hez. Skuiz,

va mignon en deus ehanet da sevel war begou e dreid, hag e sonjan e bedi da zont er-maez. Gwelloc'h vije d'ezan dont eur wech all pa vije nebeutoc'h a dud.

Met setu savet c'hoant gantan da chom.

— Sell-ta, emezan, hag e tiskouez eur plac'h yaouank daoulinet, du-hont a-gleiz d'eomp. Eur plac'hig eo, koant ha sioul o pedi. Met daoust hag he c'hoantiri pe he doare da bedi eo en deus skoet va mignon.

— Sell'ta, emezan d'in adarre, sell'ta ouz ar skritell.

Neuze hebken e welis edo ar plac'h yaouank o kestal. Evit piou e plije d'ezi chom eno keit-se ?

Ar skritell a oa a-us d'ar gador m'edo warni a zouge ar geriou-man : evit sevel beleien.

— Ba ! n'ez eus aze netra hag a vefe ken souezus ! emeve, souezet o welet n'en doa va mignon c'hoant ebet da zont er-maez.

— Gortoz, gortoz c'hoaz, a lavar d'in.

*

**

E-kreiz an iliz, koulskoude, setu eun tamm freuz. Eur gwaz, yaouank c'hoaz a zo douget war-du an nor gourvezet war eur c'hraoz.

Hogen en eur dremen e kichen ar plac'hig o kestal en deus graet sin d'ar glanvdiourez. Eur pennadig ehan, amzer d'an den mac'hagnet da lenn ar skritell : evit sevel beleien.

Farbouchat a ra e c'hodell hag e tenn anezi eun dournad peziou a dôl e kef ar plac'hig, hag e ra sin da vont kuit.

— Ac'hanta, dont a res ? a lavaris adarre d'an mignon pa oa eat kuit an den mac'hagnet.

Va mignon a vousc'hoarz gant truez o sellet ouz ar c'hristen dizeblant ma 'z oun.

— Ar plac'hig-se o kestal, emezan goustad ha kuzulik, hag an den mac'hagnet o rei ken brokus, ...Hag o daou evit sevel beleien ! Kement-se ne lavar d'it netra ?

Hag e sell ouzin evit va lezel da lenn en e zaoulagad tenerreat.

— C'hoant am eus gwelet eur beleg, emezan eur pennadig goude. Dont a ran da anaout talvoudegez ar velegiaj. Kredi a ran zoken ez in da govez...

*

**

Eur viktor muioc'h war ano Intron Varia ar Viktoriou, Mamm ha Rouanez ar velegiaj... O. BER.

BREZEL A ZO EN ETIOPI

An Etiopi

An Etiopi a zo eur vro eun hanter brasoc'h eget ar Franz, enni wardro unnek milion a dud. Ar ger-benn eo *Addis-Abbeba*, eman enni an « Negus », mestr-bras ar vro, « Roue ar rouaned ».

Kalz relijionou a zo etouez tud ar vro. 3.500.000 anezo a zo kristenien diforc'het (chrétiens schismatiques) hanvet c'hoaz kop-ted. Bez'o deus eskibien, beleien, menec'h, met kavet e vez en o relijion mesk ha mesk, kredennou an aviel, kredennou ar juzevien ha zoken falz-kredennou ar baganed. Met, daoust da se e karont kenan ar Werc'hez Vari.

3.500.000 all a zo mulzulmed.

3.500.000 all a zo paganed.

15.000 hepken a zo katoliked.

Al lodenn vrasa eur ar visionerien a zo tadou kapusin eus hor bro. Daou anezo, an tad Marie-Bernard hag an tad Charles, a zo en em laket da entent ouz an dud taget gant al lorgnez, hag al lordi savet ganto a zo brudet dre ar bed a-bez.

Sklaer eo d'an holl, n'eo ket ar brezel savet etre ar vro-se hag an Itali, eo a ray ma vo aesoc'h d'hor misionerien labourat.

Ar brezel.


Gant piou eman ar gwir ?

N'emañ ket gant ar re ne zalc'hont kont ebet ouz an emgleoioù sinet etrezo hag ar poblou all...

N'emañ ket gant ar re a ra brezel evit staga douarou nevez ouz o bro, war zigarez ma'z eus enni re a dud...

N'emañ ket gant ar re a ra brezel war zigarez mont da zeski beva d'an dug gouez... Daoust hag o laza an dud eo e vez desket d'ezo beva ?

Pedomp ma ehano ar brezel, ar brezel « tra spontus, eme Hon Tad Santel ar Pab, hag ar sonj hepken anezan am laka da skrija ».



Dirak iliz-vras Addis-Abbéba ar soudarded a zo deuet da bedi evit ar peoc'h. Karout a reont dreist holl pedi ar Werc'hez.

EUN ILIZ !

Sonj hoc'h eus eus komzou hor Salver : « Me eo ar Pastor mat ! anaout a ran va denved... Denved all am eus c'hoaz ha n'int ket eus ar c'hraouiad-man ; ret eo d'in o digas ivez... ha ne vo nemet eur c'hraouiad hag eur pastor hepken. »

Hag e lavare c'hoaz dirak e ebestel er Gambriid : « Tad Santel, diwallit ar re hoc'h eus roet d'in, evit na raint nemet unan evel-domp-ni. »

Hervez ar c'homzou-se, an Iliz n'eo ar gwir iliz nemet ma z'eo unan, nemet ma weler ar gristenien bodet enni o kredi ar memes gwirioneziou, o heuilh ar memes gourc'hemennou, o reseo ar memes sakramanchou, o senti ouz ar memes Pastor.

Ha setu amañ traou hag a ziskouez e teu kement-se da wir en Iliz katolik.

*
**

Da viz mezeven, er bloaz-man, kristenien ar Tchec'ho-Slovakia o deus bet eur vodadenn-veur, e Praha (Pragues, e galleg) da brederia asamblez war ar wiorionez-mañ : « Jezuz-Krist eo salver an dud e kreiz ankeniou an amzer a-vremañ. » Hag evit kloza ar gouelioù kaër-se, e voe graet, en deiz diweza, d'an

abardaez noz, eur brosesion vras war blasenn Sant-Venceslas.

Pa voe lakaet an Osti sakr war an aoter a-wel d'an holl, ar Gredo a voe lavaret, goustadig, er chouec'h yez a gomzer er vro, an eil goude eben (tchec'h, slaveg, slovakeg, alamaneg, poloneg, hungareg) ; c'houec'h yez, met eur Gredo hepken.

Ha, goude, an holl gristenien a oa eno bodet a ganas evit meuli ar C'hris, roue ar bed, prest d'o ben-niga, an Tantum ergo, e latin, e yez boutin an holl dud fidel a zo en Iliz katolik.

C'houec'h yez, ha d'an nebeuta c'houec'h gouenn-dud er Tchec'ho-Slovakia : eur feiz, eun Iliz hepken !

*
**

Hag, evit an holl gatoliked strevet, amañ hag ahoñt, dre bevar c'horn ar bed, eur mestr en Neñvou : Jezuz !

Eur mestr war an douar : ar Pab, vikel Jezuz-Krist e-touez an dud.

Ha diwar-benn kement-mañ, an ao. Duplessy a skrive, n'eus ket pell, er gazetenn « La Croix » :

« An Iliz a zo unan abaoe m'eo bet savet. Met dre ma

— 1239 —

teu aesoc'h d'an dud mont eus an eil penn d'egile d'ar bed, ha kas o menziou eus an eil bro d'eben, n'eus forz pegen pell, dre an telegraf, an telefon, an T. S. F. , e teu aesoc'h ivez d'ar gristenien beza unanet etrezo, ha gant o mestr bras.

« Eur skouer hepken : ar Pab a hell dre an T.S.F. bremañ, o komz er Vatikankan, kas, e vouez hag e vennoz er memes mare, da dud fidel ar bed holl. Ha setu ar pezh a reas evit Kendalc'h bras ar Sakramant e Buenos - Ayres, hag e Lourd, e penn kenta ar bloaz-man, hag e Strasbourg, en hanv diweza.

Lod a lavaro marteze : « N'eus forz piou, gant ar memes benveg, a hello beza klevet kenkoul eget ar Pab. »

« N'eus fors piou a hello

komz evel ar Pab, dre an T. S. F., gwir eo. Met piou a vo selaouet eveltañ :

« N'oc'h ket gouest da lavarout d'in hano eun den hag a hellfe komz evelse, o c'houzout mat emeur o c'hortoz e gomzou, hag a vezo ar c'homzou-se klevet ha selaouet dre ar bed holl, gant ar brasa evez hag ar brasa doujanz, evel komzou ar mestr ne'z eus nemetañ a zalc'h plas hor Salver e penn an Iliz, hag e tle an holl gristenien senti outañ. »

*
**

Eur feiz, hag unan hepken !

Eur mestr, ar Pab, hag unan hepken !

Eun Iliz, hag eun Iliz unan !

KEON.



Ster ar Jourden m'eo bet badezet ennan
Hor Salver Jezuz-Krist.

Nedeleg !!



- 1 Noel, Noel d'an elez flamm,
D'ar Mabig Jezuz ha d'e vamm.
Ganet eo ar Mab Unik
E Betleem en eur c'hraouig,
En eur c'hraouig du ha tenval
Kousket etre daou aneval.
- 2 'Tre eun azenn hag eun ejen
'Touez eur dournadig plouz ha foenn.
E dreid hag e zaoarnigou
A zo skornet gant ar riou.
Prest eo va c'halon da ranna
'Welet ar Mabig Jezuz o krena.
- 3 O tud Betleem c'houi zo ingrat,
Ne lojoc'h ket Mari hag he mab,
Ha c'houi a loj ar pinvidik
E kambrou kaer ha magnifik.
Pa zeu eur brinsez war ar bed
N'eo ket a druilhou eo gwisket,
- 4 Gwisket eo en arc'hant hag en aour,
Ar Mabig Jezuz a druilhou paour.
Eur bloavez mat a reketan
Da gement den 'zo en ti-man.
Eur bloavez mat digant Doue,
Joa ar baradoz d'hoc'h ene.

Ar ganaouennig-man a vez kanet hirio c'hoaz e meur a barrez
gant ar gurved pa reont tro ar barrez da glask o c'halanna.

Skeudenn prestet gant « Au Service de tous » 75, Rue de l'Assomption, Paris XVI.

Evit beza salvet eo ret anaout ha kredi

Mister an éternite

Ar baradoz

Jam hiems transit..
Flores apparuerunt.
Ar goanv a zo echu...
Skedi 'ra ar bleuniou.

Ar goanv eo ar boan, an drubuilh gwaskus, an denvalijenn. Ar
bleun eo al levenez, ar peoc'h, ar splander.

Echu am eus da gomz eus ar poaniou garo a zo o c'hortoz ar re
fall goude ar maro.

Komzomp breman eus al levenez hep par a vo lodenn ar re vad
epad an eternite.

Ma ne ouezomp ket kals petra eo an Ifern, nemet eo eur boan
spontus a bado da viken, ne ouezomp ket kals gwelloc'h petra eo
ar Baradoz, nemet eo eul levenez, eur blijadur, eur splander zispar,
a bado dalc'hmat.

Pep seurt anoiou a zo roet, er Skritur Santel hag e pedennou
an Iliz, d'al lec'h ma chom ennan, eurus warlerc'h ar maro, ar re
salvet : Ar Baradoz, a venn lavarout al liorz kaer, brao; an Nenv;
ar vuhez eternal; al lec'h a beoc'h, a sklaerder hag a c'hloar; Bro
an eurusted; Kêr santel Jeruzalem...

« Roit d'ezo, o va Doue, an diskuiz eternal », a lavar oferenn
ar re varo, « ha grit ma splanno warno ho sklaerder da virviken. »

— « Roit d'ezo al lec'h a c'hoal, a beoc'h hag a sklaerder ».
Pa gaser an hini maro d'an douar, e kaner d'ezan : « Ra deuo
an Elez d'ho kas d'ar Baradoz. Ha ra vezot digemeret gant ar ver-
zerien ha kaset ganto da gêr santel Jeruzalem evit kaout eno ar
peoc'h eternal. »

Ar Baradoz a zo eta eul leac'h a beoc'h, a sklerijenn, warlerc'h
trubuilhou ar vuhez-man ha poaniou leskus ar Purkator.

Hag oc'h ober petra e tremeno ar Sent o eternite ?
Da genta, oc'h anaout Doue, a lavar Jezuz-Krist e-unan. —
« Hoc'h anaout, o va Zad, c'houi ar gwir Doue, hag anaout an hini
ho peus digaset, Jezuz-Krist, setu petra eo ar vuhez eternal. »
(Joan XVII, 3).

Ha pehini a vo stad ar re salvet el lec'h-se a sklerijenn hag a
beoc'h ?...

Eur stad a eurusted dispar : « Plijadur hag eurusted o dezo
ganeoc'h, o Doue, rak c'houi a zo eur mor a levenez, hag e kreiz
ar mor-se e vevo ar Sent ganeoc'h dalc'hmat. » (Ps. 35, 9).

Kant tra-all a gaver er Skritur-Santel diwar-benn ar Baradoz,
met holl e lavaront ar memez tra. Daoust peger brao eo ar ge-
riou-se, ne lavaront ket koulskoude, e gwirionez, petra eo eurus-
ted ar Baradoz. Perak ?

Siouaz, war an douar ne ouezer ket petra eo beza eurus. Goulennit ouz an dud petra eo beza poaniet, beza maleurus, an holl a responto e ouezont petra eo, rak ar bed-man n'eo mui nemet eun draonienn a boan hag a zaelou.

Met petra eo beza eurus, den n'hel lavarado d'eoc'h, rak war an douar-man n'eus ket a eurusted. Rak-se eo dies bras lavaret petra eo ar Baradoz...

E peleac'h e vez kavet an eurusted ?.

Lakit en eur bern, mar kirit, holl blijaduriou hag enoriou ar bed-man, ha roit anezo d'ar memez den.

1. Da genta eur palez kaer, war gern eur menez gant eur gwelad kaer en dro d'ezan, traoniennou doun gant steriou o redet flour; koajou bras a bep tu gant a bep seurt gwez : re uhel o vransellat en avel, re-all karget a vleun hag a frouez; en dro d'an ti bokedou kaer bep seurt liou d'ezo o leunia ar c'horn bro gant o c'houez vat... Ha pell du-hont ar mor bras o krozal.

Ha kaout a raio an den-se an eurusted en eul leac'h ken du-dius ?...

2. Lakit c'hoaz en deus mestr ar palez-se graet eun dra gaer, hep trouz na brezel, rak etrezo ez eus eur garantez ker bras, ken tener ha ken start ma ne c'hellont beva eurus an eil hep egile.

Ha kavet en dezo an den-se ar gwir eurusted ?...

3. Lakit c'hoaz en deus mestr ar palez se graet eun dra gaer, eun dra hag en deus talvezet d'ezan ar vrasa enoriou. E vro a oa gwasket gant diavezidi a rae brezel d'ez. Hag e genvroiz ankeniet a lavare kenstrezo : « *Dizale e vo diskaret hor bro, ma ne vezomp ket difennet gant hor mestr* » Hag e teuer da gaout an den-se da lavarout d'ezan : « *Hor saveteit* ». Hag hepdale an enebourien a zo skarzeta eus ar vro. Pa zistro eus ar brezel, gounezet gantan ar viktor, ar bobl a-bez a sav evit mont d'e ziambroug, war e benn e lakaer eur gurunenn aour epad ma kan an holl : « *Gloar hag enor d'eoc'h, c'houi hag ho peus saveteit ho pro. Trugarez d'eoc'h a greiz kalon da virviken !* »

Ha kavet en dezo, war an douar, an eurusted an den-se ?

Siouaz, holl draou kaer ar bed-man : plijaduriou, danvez, gloar, enoriou, n'int nemet tammouigou levenez e-kichen mor bras al levenez eternal, ha ne c'hellont ket lakaat kalon an den da veza eurus, rak spered ha kalon an den a zo demhenvel eus eun islonk, eun toull doun, bras ha digor.

Kaer e vo teurel en islonk-se holl vadou ha plijaduriou an douar ne vo morse leuniet : madou an eternite hepken a c'hell e leunia.

Met, eur wech c'hoaz petra eo eurusted ar Baradoz ? — Den ne c'hell hel lavarout. Sant Paol e-unan, savet eun deiz betek ar Baradoz, pa ziskennas ne c'helle respont nemet teir gwech an hevelep ger : N'ouzoun ket ! N'ouzoun ket ! N'ouzoun ket : « *Daoulagad an den n'o deus ket gwelet; e ziskouarn n'o deus ket klevet; e galon ne c'hell ket anaout nag e spered kompren ar pezh en deus graet ha kempennet an Aotrou Doue evit ar re hen kar.* »

Peger bras, pegen kaer eo eta an eurusted peurbadus ?...

Lennerien ger, bevit hervez lezenn Doue war an douar ha c'houi her gouezo eun deiz.

MELEGAN.

Tri gloareg

Epad an hany oan tremenet dre eur barrez eus kreisteiz ar Frans, war ar maez, hag oan chomet eun nebeud derveziou d'ober eun ehan rak ar vourc'h a oa koant, ha brao tud e-leiz, re vras ha re vihan, o tont d'an oferenn. Netra kaeroc'h eget ar vourc'h da sul en eur barrez a feiz.

Kaer am oa gortoz, ne welen den o tostaat. Ar c'hleier a oa bet sonet, met ne zeuas nemet eun dousenn merc'hed koz, hag eun dousenn vugale. Aet en iliz, n'em eus gwelet nemet daou c'hoaz, en o sav a-drenv d'eur pilher, hag ez eus er barrez c'houec'h kant tiegez bennak, ha ne vez lavaret nemet eun oferenn.

An oferenn a voe kanet, hag ar c'han a yeas brao awalc'h en dro, rak tri gloareg yaouank a oa er c'heur hag o doa moueziou mat.

« *Penaos, a lavaren ennon va-unan, e c'hell beza tri gloareg en eur barrez a zo enni kennebeut a dud o tont d'an oferenn* ». N'oa ket evit kompren.

Ha me, goude lein, mont d'ar presbital ha goulenn digant an aotrou person eus peleac'h oa an tri gloareg am oa gwelet en iliz... « *Eus ar barrez-man, a drugare Doue* » a respontas an aotrou person.

— « *Eürus oun o klevet ac'hanoc'h, rak ezomm bras a zo a veleien. Meuleudi a roan d'eoc'h, rak n'eo ket hep poan hoc'h eus gellet kaout tri gloareg.* »

— « Gwelet a ran, eme an aotrou person, hoc'h eus c'hoant gouzout penaos ez eus tri gloareg en eur barrez ha n'eo ket eus ar re wella. An dud aman n'int ket fall, n'int ket enebourien d'ar beleg, met lezirek, troet war ar c'hoariou ha plijadureziou. Da sul n'eus nemet eun nebeut merc'hed koz ha bugale o tont d'an oferenn. Mat, etouez an dud-se em oa kavet eur paotr a galon vat, a spered lemm, em oa gellet kas d'ar c'hloerdi bihan ha d'ar c'hloerdi bras hag a dlle beza beleget er bloaz 1915. Siouaz ! Dont a reas ar brezel, ha evel kalz eus ar zoudarded eus e oad e varvas evit ar Frans. Araok mervel e skrivas d'in eur lizer da lavaret e kinnige a greiz kalon e vuhez hag e velegiaj da Zoue evit ma vije kavet tud yaouank da vale war e roudou, da c'houlenn mont da veleien. Evel ma c'hellit kredi, al lizer-se a zo bet lennet er gador-brezeg ha roet da anaout da holl dud ar barrez. Mat, an dud-se hag o deus doare da veza klouar

ha lezirek war o deveriou a relijion, a lenvas ganen war ar c'hloareg a oa maro, hag eveldon e lavarent : « *Pebez gwall- eur ! Eur c'hloareg ker mat hag en devije graet eur beleg eus an dibab !* »

Lavaret ez eus bet : « *Diwar gwad ar verzerien e sao kristenien nevez.* » Evelse ivez pedennou, poaniou an dud yaouank-se maro er brezel a denn warnomp grasou Doue. Her gwelet em eus en eun doare splann meurbet. Eiz dervez goude m'am oa lennet lizer ar soudarded maro, e teuas d'am c'haout ar gwella eus va c'hurusted. « *Aotrou person, emezan, Robert, ho kloareg, a zo maro. Eun all hoc'h eus ezomm en e lec'h, ha me a vezo hennez. Va zad ha va mamm a ro o asant. Va c'hasit, mar plij, d'ar c'hloerdi bihan.* » Bloaz da c'houde e teuas eun all hag eun all c'hoaz. Hag o zri o deus dalc'het mat ha fizians am eus e vezint o zri beleien. O mistri n'o deus ken youl nemet labourat evit gloar Doue ha silvi-digez an eneoù. »

Hag o klevet ar beleg-se, kement d'ezan a feiz hag a fizians, e lavaren ennoun va-unan, o kuitaat ar presbital : « *Ar re-se, ar veleien, eo a zalc'h ar Frans en he sav. N'eus nemet an dud diskiant oc'h ober fae warno.* »

PER.



Per an Dizek. — Lavar d'in' ta, Yann, penaos e ra an heol e gont evit sevel atao er memes tu ha mont da guz atao ivez er memes tu ?

Yann an Doktor. — Chè, Per, te chomo atao ken azenn... Epad an noz an heol a zeu endro, met peogwir e vez tenval ne vez ket gwelet o tizrei. Setu perak e hell atao sevel er memes tu.

Mision St-Goazec



Ar prosesion a-dreuz or parkeier.



Bugale Mari



Ar baotred yaouank a zougas ar C'hrist



Ar vugalegou gwisket e gwenn en-dro d'ar C'hrist



Goulennet ez eus bet diganeomp

*displega er Vuhez Kristen
diou pe deir eus parabolennou
an Aviel...*

Hen ober a raimp...

met gortozit eun tammig.

Ma ho peus c'hoant

embann er Vuhez Kristen eur
skrid bennak,

n'ho peus nemet hen degas da :

Père MÉDARD

28, Avenue de la Marne

(Morbihan)

L O R I E N T